

En dizro euz Pardon Sant-Egarek



I

O pardona me a zo bet
E ron lon la, lantigouda
O pardona me a zo bet
E chapel Sant Egarek. (3 gwech)

II

Hag en eur zizrei ac'hano
Ne welen nemed touriou.

III

Hag a ioa enno kleier
N' doa ket a vazoulennou.

IV

Hag a zone oll ker skedik
Evel ma ra ar muzik.

V

Ha me klevet eun durzunel
O kana war he bodenn.

VI

Dre he c'hanaouenn e lare :
« Da vestrez-te zo klanvêt. »

VII

Na me ober eur pennad red
En aviz mont d'he gwelet.

VIII

Er wech kenta m' oan eat en ti
Oa war ar bank o c'hoari.

IX

En eilved tro m' oan eat en ti
Oa 'r beleg ouz he noui.

X

En drede tro m' oan eat en ti
Oa war an daol lienet.

XI

Ha me ha kommans da ouela
« Na petra rin-me brema ? »

XII

Va c'hamarad a laras d'in
« Na te zo sot o ouela. »

XIII

« O ve'a m'eo maro Gwilllamet
» N' ket maro an oll verc'hed. »

XIV

« E Lesneven er ru Nêvez
» M'euz choazet peder mestrez. »

XV

« Ha diou anezo a zo koant
» 'N diou all a zo nestamant. »

XVI

An diou goanta a gemerjont
Hag an diou all a lezjont.

XVII

An diou entre a lavare
« Hor c'hasit ganeoc'h ive. »

XVIII

— « Er wech all pa deufomp en dro
» Neuze ni ho keméro. »

XIX

— « 'Benn ar wech all pa deuoc'h en dro,
» Neuze ni a vô maro. »

XX

« Ha war hor bez e vô savet
» Peder rozenn ar gaëra. »

XXI

« Unanik ruz, unanik wenn,
» Unan c'hlaz, unan welen. »

XXII

« Roz klemm a ziou, roz nec'h a gleiz
» Keuz ha rann-galon e kreiz l »

Destumet gant J. M. an NAN, euz a Zant-Nouga.